



CANTIC SPIRITUEL

VAR GLACHAR AR VERCHEZ.

Var ton Michel Nobletz.



JESUS ra vezo meulet hac e Vam beniguet,
A zezir a wir galon sicour ar Vretonet ;
Revelet en deveus bet da eun den dign a feiz
Scriva eur C'hantic nevez da bublia en Breiz.

Pa e güelas, an den-mâ a voe estonet bras ;
He Mab etre he divrec'h goude disqen ar Groas :
E divrec'h hac e bizaj voa rusiet gant ar goad ,
Me vell e oll esperanç eur sujet admirabl .

Me meus qement a drue, emezi, ouz an oll ,
Me garfe gallont miret ne dae den dà goll ,
Deut òn d'oc'h avertiss, m'ho ped ne vanqit qet ,
Disclèria caràn sicour ar bec'herien dallet .

Itron, c'houi zo quer caret gant ho Mab beniguet ,
A guement a c'houlenfot ne vioz refuzet ,
Ha possibl ve e renquer caout eur speret humen
Da obtieni ho reget evit ar bec'herien.

Me a zo q'en ordinal evel ma red an dour ,
O c'houlen digant ho Mab d'ar bec'herien recour ,
Hac o veza respontet : me n'ho refuzan qet ,
Ne allan qet pardoni da nep ne c'hoanta qet .

Var ze eta, Christenien, preparit ho speret
Da receo en ho calon ar c'homzou anoncet
A c'henou sacr ar Verc'hez, gant truez ouzomp-ni,
Biscoas ne glêvas Christen q'en truezus hac hi.

Va Jesus, leun a druez, permetit gant ho Mam
Ma ellin antrepreni e dezir gant estlam ;
Estranch a bep den habil consideri a vouez
Gallout güela a galon ha cana assambles.

Qement den e zelaouo a bep seurt qalite ,
Zo crissoc'h eguet eun tigr, eguet eul leon goe ,
Ma na ell dont da vouela pa entento e lenn ,
A ell donet da zonjal n'en dê qet güir Gristen .

Vit an oll asistantet, Rouanez, me ho ped,
Contémplit ho clac'har vrás, ma cassaint ar pec'het;
Ma servicho ho taelou da voelc'hi hon ene,
Me zezir, a wir galon, remission dêze.

Qement den a regreto e amzer dremenet,
Hac a güittai e viçou en amzer da zonet,
Me assur en devezo remission plenier,
Henvel ouz ar Vadalen, güechall gant hor Zalver.

Me garfe, en güirioné, gout ar sujet a ze,
M'ho poc qement a c'hlac'har e durant ho pue;
Biscoas ne voe mam er bed qen trvezus ha c'houi;
Eus ho pers ne veritjoc'h glac'har na melconi.

Pa anonças Gabriel e tougjen va Doue,
E recevis eur joa vrás em c'horf hac em ene,
Mes ur feunteun a c'hlac'har em c'halon a zavas,
Qeitha ma chomis er bed, nep amzer na cessas.

Pa ziscléryas Simeon etre ar prophetet,
E voa deut ar Mab-unic da redima ar bed,
Fachet voe ar Judevien pa glêvjont lavaret
E c'hanjen eur c'hrouadur, hep goalan va güerc'hdet.

Me meus en douguet nao mis etre va daou goste,
Q'en trist ha q'en glac'haret, injuriet gante,
Gant qement a nec'hamant hac aon eus va bue,
Penevert va c'honeuctor Joseph am asiste.

Pa dinessas an amzer da zonet var ar bed ,
Me zezire e c'henel en eur plaç preparet ;
Mes Doue a bermetas ha ma viont rentet
Entre e adversourien er guær a Nazareth,

Da ben eun nebeut goude e voen avertisset
Ma qüittajen ar c'hontre rac ne vije lazet ;
Hennes voa an nec'hamant, balamour d'er buguel ,
Rencout qüittât ar c'hartier pe'lacat da verval.

O Tad leun a drugare, sellit ho crouadur
Hac e Vam qer glac'haret o vont en avantur
Gant qement a baourente ! m'ho ped d'o asista :
Alias ! me ne meus pouvoar nemet gouela outé.

Pa voan èru en Egypt e sònjen caout repos ,
Mes en nebeut a amzer e chenchas direpos ;
Herodes a ordenas elec'h ma commande ,
Ma vije incontinant lazet ar vugèle.

Na gafet speret humen a else disclèria
Ar glac'har aim possedas pa glèvis qement-mâ,
O tont da gonsideri eo an occasion
E lazer ar vugale vit laza ar mignon.

Meurbet e zòn estonet o consideri ze ,
Ma anduras er bed-mâ qement a baourente ,
Qement a voa er bed-mâ en devoa oll crouet ,
Hac a zentje sur outan , ma vije e zouet .

Pa bec'has hon tad Adam e voamp oll ruinet ,
Ma tisplichemp da Zoue en devoa hor c'hrouet ,
E zajemp oll d'an ifern , den n'en devoa repos ;
Sujet voamp da Lucifer , serret voa'r Barados .

Dre drue ha carante ec'h ordrenas an Tad
Da gass ar Speret-Santel da incarni e Vab ,
Ar boannion a verite e oll grouadurien ,
A zeziras da gouzany hervez Doue ha den .

Pa voa èru an awizer a voa determinet
E yas gant e zisqibien d'ar jardin Olivet ,
O veza oboissant da volonte e Dad .
Elec'h droue a veritemp , e tezir c'hoas hor mad .

D'ar güener mintin golo e teu Yan da velet,
Hac én en noas divisqet qazi voe trelatet,
Hac e lavaras : Mari, emâ eo ar glac'har,
He Mab a zo qemeret eguis eur c'hriminal.

Qement ma heulias velet e zon êt d'ar mene,
Ma finis dizesperi pa na ellen mervel,
O vont etre daou laeron n'o anaveent qet,
E oad, e guic, e groc'hen à voa oll dispennet.

Pa voe divisqet ar zê, e velen e esqern,
Neuze e velis c'hoezec o chassa gant qerden
Var e dreid hac e zigrec'h ha dious toullou ar Groas
Sur e verit'er pec'her caout punition vrás.

Pa voe goroet en noas e enep an amzer,
E soufras injuriou bras etre an daou voler :
Te a lavaras bea Roue ar Judeanet ,
Ni es laqa cabiten etre ar brigantet.

Qent eguet ma finissas ne refusas nicun ,
Meritou e bassion d'an oll a voa commun ,
E roas demp da entent ne voa den refuzet ,
Digor yo ar Barados qen a vo fin ar bed.

Nemet eiz ha tri-uguent e zê bet sez mil bla
Ar Barados voe serret o c'horlos qement-mâ ;
En e c'houerzân evidomp, deân omp oblijet,
Nep a gredo d'e lezen ne vezo qet collet.

Dre verit e bassion, Itron, eo hor prenas,
Ne recevas nep hini, hon dle oll a baeas,
Ha goucoude pa lennân, e cavân rapportet
Pa zeont eus ar bed-mâ calz a dud zo daonet.

Qer bras voe e garante evit e vugale,
Ma permet da bep hini ober e volonté ;
N'ellont qet lavarat qeit ha ma inter bed-màn :
Me zo crouet gant Doue evit sujet deân.

Disqennit, me ho suppli, va Mab, demeus ar Groas,
Vit m'en ambrassin amàn var ar glinoat glas ;
Emedi er baourente, var an teil eo ganet,
Hac en noas ez ê maro, hac én noaz entêret.

Me bed Joseph, va migoon, abers Doue an Tad,
Da ober eur bez neve evit laqat va Mab,
Pa vezo ressuscitet, ha na vurmuro den ,
Pa vezo ressuscitet na ve qet va Mab ve.

Pa voamp eus e entêri, neuze ec'h êruas
Ar Judevien arrajet hac a epouantas,
Ma qüittas va mignonet gantspont ouz ogüelet,
Hac e chomis va-unan hep gout pelec'h monet.

Va Zad beniguet en ên, hae én a voe biscoas
Eur femelen var ar bed a eur glac'har quer bras!
Cetu me abandonet var menez Galvari;
An nôs a zo o tonet, ho pet truez ouzin.

Autrou Doue, va C'hrouer, roit patientet,
Gant va Mab, pa voe er Groas, me voe recommandet
Deàn da veza va Mab, ha me da Vam deàn,
Hac ez òn qüittêt gantân ha lêzet va-unan.

Me ne meus qet ho qüittêt na birviqen na rîo,
Bet òn o pourvea cambr evit ho repui,
Qemerit patientet, Mari, na vouelet mui,
Dont a rai aben tri de ho Mab d'ho consoli.

Ne voa speret qen parset nac Alez en ênvou
A garfe bea er gampr da glevet ar c'havou
A ra ar Vam a druez gant ar glac'har d'he Mab
Criz è ar galon e zònj na deuse da dristat.

Me eo an druezussa a voe biscoas er bed,
Gant an oll-òn dispriset, cassêt, dizenoret,
Eguis eun oan égaret etre al leoned,
Pa zon lèzet gant va Mab, va Zad vad vasicouret,

Allas ! pelec'h e zin-me pa vez deut an dez?
Mui a valiç zo ouzòn éguet a garantez ;
Ma sortiàn, ne velia nemet an tirantet,
A garfeva merzeria, vad Zad, mar permetet.

Er plaç-mâ e voe Mari o vouela nôs ba deiz,
Hep na debri nac eva e spaç eus a zri deiz ,
O contempli ar boanniou a verit ar pec'het
Truez eus ar bec'herien en amzer da zonet.

Pa ressuscitas va Mab, e teuas d'am güelet,
Ha me goulen digantàn : e pelec'h e zoc'h bet?
O serri pors an ifern, va Mam, eo e teuàñ.
Qement a voa o c'houzàn a meus lamet a boan.

Calz a dud malia a vo va goude var ar bed,
Hac a vo qen efrontet, va Mam, da lavaret :
Pa n'en deus nemet ur plaç è ret e vemp salvet,
A souille ar Barados, va Mam, gant o fec'het.

Va Zalver, me ho suppli, ha n'am dilezit qet,
Recommändit va ene d'hon Tad, crouer ar bed ;
Ho pezit sònj ac'hanòn e Barados ar gloar ,
Ma vin caret en ênvou, pa n'en dòn en douar.

Tri bla varnuguent goude ez eo bet en bœz,
Dá gourachi an ebrestel da bublia ar feiz.
Qement graçou na vertuz a zisqen en douar ,
A dremen dre e daouarn dre vertu e glac'har.

A het tri blos varnuguent bemide e zè Mari
Da zaludi Croas he Mab var menez Calvari ;
Biscoas n'en em gontantas o veza deiz ha nôs
O regeti ma yaze an oll d'ar Barados.

Pa gonsideras he Mab, u'en em gontante qet
Da regeti digantân qüittât poanniou ar bed ,
E tigassas Gabriel en e c'hambr eus an ëe ,
Da annonci da Vari pe da heur e varvje.

Pa ho saludis qenta; Mari, me a zònje
E vije contantamant ha joayou ho pije ;
Nemet glac'har ha poaniou goude ze noc'h eus bet ,
Ha c'houi ve oboissant da zilêzel ar bed ?

Evit dilêzel ar bed me ne rân qet a gas,
O qüittat ar Gristenien e meus melconi bras;
Chom da vouela evito a gorfenn er bed-màn,
N'en daë d'en d'an ifern evit anduri poan.

En qeit ha ma tezire Mari chom var ar bed,
Ho Mab ho car quer parfet ha no refuso qet;
Daouzez blas ha tri-uguent aboe e zoc'h er bed,
Poent eo qüittat ar glac'har ha bea consolet.

Va Mab, me a zezire vize an ebrestel
Presant ouz va asista pa deujen da vervel :
Va guervel a rent o Mam hac o zoulajamant,
Ma lezin dezo va c'horf evit va zestamant.

An ebrestel egaret a bep contre a bell
A voe souden assambliest neuze var eur goabren,
Ha rentet en un instant er gambr ar miracl bras
Da zonet d'e asista, rezervet Sant Thomas.

Thomas neuze en Egypt a voa neuze rentet,
Ne voar qet e pe seçon, er Jardin Olivet,
Evit gallout rî rapport ar myster admirabl,
Er plaç ma velas e vestro c'hoezi dour ha goad.

Dre eun inspiration e tisqennas timat
Eus a Jardin Olivet e traouyen Josaphat,
Ma cavas an Ebrestel, hac int oll glac'haret,
O voela d'o Mam Mari e devoa o c'hüittet.

Disquélidin, va breudeur, ar bez mavoë Mari
Rae me a gred assuret brêma ne medi mui ;
Me meus-hi anaveet o vont corfhac ene
E compagnuez he Mab, ar Zent hac an Æle.

Te, eme Pêr da Dhomais, a zo incredulas,
Ne gredes qet e vije ressuscitet Jesus,
Penevert ma e laqas da douch e bemp gouli,
Ha bremâ ne gredes qet e ma er bez Mari.

Me ho suppli, permetit ma tigorin ar be,
Ha neuze me a rî dêc'h güelet ar virione ;
Pa voe digoret ar be, ne voa netra ennâ
Nemet al lincel a voa laget d'he liana.

Nemet Doue ne alie disclêria ar glac'här,
Qement e voent estonet ma coeent d'an douar ;
Ne allent qet caout couraj da zevel ac'hane ,
Qen ne vijen consolet gant an El eus an ëe.

Pa vo ar Varn jeneral, va c'halon a ro din
Ne meus qet bet var ar bed qement a velconi
Evel am bezo neuze, pa glêvin ar re daonet
O c'houlen ouzin sicour, ha me ne ellin qet.

Me a gred pa c'houlennot e cavo agreabl,
Ne zeus netra impossabl da Jesus-Christ ho Mab;
N'en deo qet bras ar myster deoc'h caout ze digantâ,
Evel ober an douar hac an ên a netra.

Me a reqet ouz va Mab da rei pardon dese,
Me ne vezo nemedòn e prezeg evite ;
An oll breditoret, memes an ebrestel,
A vezo sur em enep avocadet contrel.

Va Mab, goela a reont ha n'o c'honsolit qet.
Me a c'houlen evito ma viont consolet ;
Ma noc'h eus trae oute, sellit ho Mam Mari
Zo dirac ho Majesle qer glac'haret hac hì.

Va Mam guèz, ne deo qet me zo qiriec d'ho clac'har,
N'e devoa qet meritet pa voan var an douar ;
Brassoc'h myster e cafen rîe o fardon dese ,
Eguet pa grouis ar môr, an douar hac an êe.

Birviqen oc'h nec'hamant ne allac'h va miret,
Mar disqennont d'an ifern ha mar bezont daonet;
Abalamour d'an divron en deveus o lèzet,
Ho pèzit true oute, n'ho c'hondaonit-hi qet.

Me garfe am be gallout da zisqüez va c'halon,
Da reqeti diganêc'h dezo remission;
Pa na servich va daëlou, va divron ha va lèz,
Va Mab, bras eo ho coler refus ar pec'her qès.

Va Mab, it d'ho Parádos gant ar re zo salvet;
Ha va lezit er plaç-mâ evit goela bepret,
Gant an dour em daoulagad me o güelc'ho qer net,
Dign da vont d'ar Barados n'o c'hondaonit-yqet.

N'ellent-y qet beza net ha qüittat o fec'het,
C'houi a voar ar viiōne ar pez a meus soufret;
Ne meus netra espernet d'o renta evit poan,
Meprizet o deus va goad, ret ê dèze gouzan.

Ennes vezo an estlam pa vezo deut an de,
Qement a vezo presant a vo spontet neuze
O clèvet ar Mab, ar Vam n'en em accordont qet,
O sònjal er re daonet prest da veza barnet.

Jesus, a c'houi a garfe e coesemp a enep ?
Nihorboa grêt hon dever etre voamp var ar bed :
Ni a garfe assuret ne vijemp qet crouet ,
Da vea control d'ho Mam a zo qen estlamet.

Mari, pa è ordrenet, e zêo ret din parlant :
Ni hor boa-hi instruet e teuj'er jujamant.
Mar dê ni a zo manqet, ni rejet diganêc'h,
Evit ma vimp oll salvet davont d'an ên ganêc'h.

Jesus, ni a zo prezant dirac ho Majeste ;
Ni a zisquuelo dezo an hen demeus an êe ;
Ni rejet diganeoc'h, mar dê ni zo manqet ,
Ha ma viont-i salvet, ha ni oll pardonet.

Va Mam, ha c'houi gred brêmâ me n'ho refusin qet ,
Me ne meus qet o c'hrouet evit bea daonet :
An diaoul o deus choazet da gonductor dèze ;
Chom a raint en ifern hed cun eternite .

Ne ven qet eurbarner just malamfen digante
Qement o devoa choazet pa voant en o bue ;
Me varvas en ho presanç da bêa o rançon ,
Hac a ro brêma deze va malediction .

Sonjomp eta, Christenien, er glac'har a Vari,
Gant truez eus bon ene rejetomp diganti
D'en em viret ouz pec'het na vezomp qet qefret
D'hor Mam Mari da voela ouz horgüelet daonet.

Itron Vari a Druez, entre m'omp en bue,
Pedit ar Speret-Santel d'hon inspira bemde
Da garet, da zervicha ho Mab gant dilijanç,
Hac en hon heur divea da gaout hoc'h assistanç.

FIN.



E Montroulez, e ty LÉDAN, e traòn ru ar Vur.